


DONEZON DOUE


Kantik evid Mision 2012

Komzou ha muzik : Kaou Sanson


Heb treina ♩ = 115




1. Do - ne - zon Dou - e eo e gorf, E gorf, an l - liz, am - (m)añ hag en neñv.
2. Do - ne - zon Dou - e eo an dour, Dour beo e gos - tez, dour ar va - de - ziant.
3. Do - ne - zon Dou - e 'zo par - don, Bra - sa ka - ran - tez, ha bra - sa dou - jañs.
4. Do - ne - zon Dou - e eo ar feiz, Res - pont ar bobl 'zo gand Dou - e gal - vet.
5. Do - ne - zon Dou - e 'zo bu - ez, A ro - io frou - ez puill di - war ar greun.



1. Do - ne - zon Dou - e eo e wad, E wad san - tel 'vi - dom oll bet skuil - let.
2. Do - ne - zon Dou - e 'zo Spe - red, Spe - red an Ad - sao en - nom 'vel eun tan.
3. Do - ne - zon Dou - e eo ar peoc'h A dorr an aon d'e drei en es - pe - rañs.
4. Do - ne - zon Dou - e eo e Gomz Gwir va - ga - du - rez kin - ni - get d'ar bed.
5. Do - ne - zon Dou - e 'zo se - hed, Se - hed eul le - ve - nez gwi - rion ha leun.



Ma ouez - fem do - ne - zon Dou - e! Je - zuz, gra deom a - naoud da ga - ran - tez.



Ma oue - zim do - ne - zon Dou - e, Ra deom se - hed euz an dour - se, a - tao.

1. Donezon Doue eo e gorf,
E gorf, an lliz, amañ hag en neñv.
Donezon Doue eo e wad,
E wad santel 'vidom oll bet skuillet.

Diskan : Ma ouezfem donezon Doue !
Jezuz, gra deom anaoud da garantez.
Ma ouezim donezon Doue,
Ra deom sehed euz an dour-se, atao.

2. Donezon Doue eo an dour,
Dour beo e gostez, dour ar vadeziant.
Donezon Doue 'zo Spered,
Spered an Adsao ennom 'vel eun tan.
3. Donezon Doue 'zo pardon,
Brasa karantez, ha brasa doujañs.
Donezon Doue eo ar peoc'h
A dorr an aon d'e drei en esparañs.
4. Donezon Doue eo ar feiz,
Respont ar bobl 'zo gand Doue galvet.
Donezon Doue eo e Gomz
Gwir vagadurez kinniget d'ar bed.
5. Donezon Doue 'zo buez,
A roio frouez puill diwar ar greun.
Donezon Doue 'zo sehed,
Sehed eul levenez gwirion ha leun.

LE DON DE DIEU

1. Le don de Dieu, c'est son Corps,
Son Corps, l'Eglise, ici et aux Cieux.
Le don de Dieu, c'est son Sang,
Son Sang répandu pour nous tous.
*R: Si nous savions le don de Dieu !
Jésus, fais-nous connaître ton amour.
Pour que nous sachions le don de Dieu,
Donne-nous soif de cette eau-là, toujours.*
2. Le don de Dieu, c'est l'eau,
L'eau vive de son côté, l'eau du baptême.
Le don de Dieu est Esprit,
L'Esprit de la Résurrection en nous comme un feu.
3. Le don de Dieu est pardon,
Amour extrême, infini respect.
Le don de Dieu, c'est la paix,
Qui brise la peur et la change en espérance.
4. Le don de Dieu, c'est la foi,
Réponse du peuple que Dieu appelle.
Le don de Dieu, c'est sa Parole,
Nourriture véritable offerte au monde.
5. Le don de Dieu est vie,
Fruit en abondance à partir d'un grain.
Le don de Dieu, c'est la soif,
La soif d'un bonheur vrai, parfait.